

# CHANSON NEVEZ

## 1<sup>er</sup> COUPLET

Me ho ped tud yaouank, chilaoued,  
Chilaoued eur sanson, a zo nevez composet. [sant  
Savet digan en den yaouank ar bloavez-man pre-  
En deus laket e speret da re garout he c'hoant.

2

Ebars ar vro, eur bloavez-man present,  
Eun dra malconius etre daou zen yaouank  
Pere dre amitié, ho devoa desired  
En eil degile vezen bed daou bried.

3

Evel eur bared avel eruas promptaman  
Ebars ar proposiou kaer, he oa bed deuet chan-  
Ac he sonjaz dezan, e voa sur a fidel [chaman,  
A zo bed trahiset ya n'en deus ket pel.

4

Me meüs choaset eur vestres a zo dam fantasi,  
Pehini dre he guenet a zo deuet dam charmi,  
Ganti ma an alc'houerou eus a zor va c'halon  
Pehini an doa contant an daou he pep feson.

5

Me meüs karet va mestres, hac he c'haron bepred  
A me he c'hurunfe ma ve din permitted,  
A me he c'hurunfe ma ve din permitted,  
Ken kaer he c'havon, evel an eol biniguet.

6

E mam zo ket charman, ebars eur bed-man  
Hi a garon certen, evel va mam, va-hunan,  
Balamour, ma he hi e deus laket er bed  
Eur plac'hic yaouank pehini a garan parfet.

## 7<sup>e</sup> COUPLET

Assata va mestres, avans he ram en oad  
Bud a zo on amzer evit ober ped-tra  
Ma vezo contant doue ni hallo assembles,  
Kaer an devezo an dud, ho trous prezeguenes.

8

Mari ha sant Joseph, voent ho daou assembles,  
Hac on devoe amitié an eil evit egile,  
An dra-ze ha zo kaus meüs laket em speret  
Da gaout eur plac'hic, martreze n'am c'har ket.

9

Kemen-man e c'haran, ne oufe den lavaret ;  
Me garfe e douguen he touez an aelet ;  
A neuze pa vem ed ebars ar barados,  
An dud malicius ne antrefen ket eur goz.

10

Mes gouzout eo a ran, an amission zo braz  
Hennes zo eur pec'hed, ha na kuitayo ket c'hoas  
Eh touez ar gueren, memes ar re dostä  
A ve an amission, a vechou ar goassa.

11

Eur zon man zo savet, certen hac ha zo guir,  
Zo zavet digan den yaouank, ne all ket kaout e  
Abalamour d'an dud, gant ho amission [zesir  
Zo ho ampech anean, ebars ar c'hanton.

12

Eur botred yaouank, hirio ma sterd dezo kaout mer-  
Re he man dikried digan eur c'hromerezed, [c'het,  
Renes zo flutened ha oar tenned planyou,  
Ac he oar troi eur merc'het yaouank digan toliou  
[téotou.

François BENOIT